

Dousik Koant

Sevel ra ar stered Dousik
Koant Dousik Koant al loar zo dis.pak
Ket Dou.sik Koant Gra varnon ma'cha.
ron.te Eur zellik a drugare me
vo.e.vurus neuze Dou.sik Koant Dousik
Koant

Sevel ra ar stered
Dousik koant, Dousik koant
Al loar zo dispaket
Dousik koant
Gra varnon ma c'harante
Eur zellik a drugare
Me da gar gant follente
Dousik koant, dousik koant.

N'avel noz a dremen
Dousik koant, Dousik koant,
Sevel ra ar c'hlizen
Dousik koant
Daerou'perl a zo skuillet
War ar bokedou kousket
Me, siouaz zo ankeniet
Dousik koant, Dousik koant.

Selaou 'ta va feden
Dousik koant, Dousik koant
Ma tec'ho va anken
Dousik koant
Gra ma vo gwir va unvre
A ro ar peoch d'am ene
Me vo evurus neuze
Dousik koant, Dousik koant.

E. d'HERBAIS.

Kalz a lennerien a c'houll diganen
« Sôniou da zansal ». Na po ket pell
da c'hortoz ; dindan neubend a am-
zer a vefoc'h kontented. Mez migno-
ned ker ar zôniou da zansal a c'houll
Kalz a blass, rag peurvia eint hir
daonet. Na vin ket eta evit rei eur
zôn a bez menez devez. Red mad a
vo din lakaat an'hef var ar Journal
en diou pe marteze teir gwech. Pe-
phini he dro. Ho hinni a zo breman
deuz ar ra genta. Trugare d'eoeh
holl.

T. P.